

Ya ! D'ar Gwener 3 a viz Eost / Le vendredi 3 août

Breizh / Bretagne

Brezhoneg e magouri Babigou-Breizh

D'ar Yaou 19 a viz Gouere e oa en em gavet un nebeud tadoù ha mammoù e magouri vrezhonek Kerbihan e Gwened evit deskiñ un tamm brezhoneg.

Gant div vaouez a ra war-dro ar vugale war ar pemdez e vezont kaset da benn, ha kontant-bras an dud gante.

N'eo ket kentelioù brezhoneg gant ul levr a vez kinniget e magouri gentañ Babigou Breizh, un tañva ne laran ket. Ur wech ar miz en em gav an dud da bemp eur tro-dro d'ar palleñ-c'hoari gant bugaligoù o vont hag o tont, huch ha c'hoarzh gante.

Un digarez e vez d'ar familhoù d'en em anavout ha da c'hoût war beserit tachenn e vez pleustret gant o bugale. A-drugarez d'an abadennoù-se e teu gerioù gant an dud divrezhonek p'en em gavont da vintin ha da noz er vagouri. Ha tamm-ha-tamm e komprenont gwell petra a vez lâret tro-dro dezhe.



Babigou hag o zud o tañva d'ar brezhoneg

Bep tro e vez pleustret war un tem disheñvel. Gant ar memes rimadell da zemata ha d'en em ginnig e krog an abadenñ. Ar c'heriaoueg a zeu da c'houde, un nebeud stummoù frazennoù da heul evit ober gant ar c'heriaoueg, ur ganaouenn pe ur rimadell nevez, ha soniñ ar re a oa bet gwelet en abadennoù all evit klozañ ganti. Hag ar vugaligoù da gemer perzh gant un tamm huch, un nebeud silabennoù, strakadennoù pe jestroù. Mammoù a vez gwelet ar muiañ. "Tadoù, breudeur, c'hoarezed hag un dintin a vez gwelet ivez." eme Mari-Soaz, an animatorez e penn ar Jeu. "A-benn miz Eost e vo un abadenñ diwar-benn al loened."

Ken talvoudus eo d'an nebeud brezhonegerien a zeu peogwir emaint krog d'ober ar memes c'hoarioù a ya gant ar c'hanaouennoù er gêr. "Da-geñver an abadenñ gentañ em eus komprenet petra e oa jestroù zo a veze graet gant ma merc'h er gêr." eme ar vamm vrezhonegerez nemeti, kontant-bras anezhi.

Gant ar gevredigezh Divskouarn he deus da bal kas ar brezhoneg war-raok a-raok ar skoliata e vez kinniget abadennoù heñvel evit ar familhoù. Kredapl e vefe muioc'h a chañsoù e choazfent c'hoazh an deskadurezh vrezhonek evit o bugale pa vo poent dezhe mont d'ar skol.

Patrick Béchard

Ouest-France D'ar Merc'her 29 a viz Eost / Le mercredi 29 août

Sant-Teve / Saint-Avé

La crèche bilingue vannetaise est ouverte aux Avéens



Hervé Pellois, Fabienne Couëpel, Sylvie Dano (adjoine à la petite enfance).

Lundi soir, Hervé Pellois, député-maire, et Fabienne Couëpel, présidente de l'association Babigou Breizh, ont signé une convention de mise à disposition d'une place (sur 55 heures par semaine), à la micro-crèche bilingue de Vannes.

Les charges de fonctionnement sont assurées par la collectivité. « Le but de cette structure d'accueil de la petite enfance est de faire évoluer les enfants âgés de 2 mois à 4 ans dans un environnement majoritairement brittophone. Ils acquièrent ainsi une sensibilité et une prédisposition à la pratique de la langue, explique Fabienne Couëpel. Le personnel est formé par l'Office

de la langue bretonne. »

« Nous sommes heureux de proposer ce nouveau service à la population, commente Hervé Pellois, bien qu'il ne soit pas tout à fait à proximité. Nous réfléchissons aussi à l'évolution de notre multi-accueil. »

La micro-crèche bilingue de 10 places de Vannes est dirigée par une éducatrice, une auxiliaire de puériculture et deux titulaires de CAP petite enfance. Elle sera ouverte aux Avéens dès le 1^{er} septembre.

Contact : Anne Mahé (directrice du multi-accueil) : tél. 02 97 60 85 45. Courriel : anne.mahé@saint-ave.fr.

Sant-Teve / Saint-Avé

SAINT-AVÉ

Microcrèche bilingue. Des places réservées aux Avéens

30 août 2012



La première microcrèche bilingue a été créée à Vannes en 2007. Une deuxième de dix places a ouvert ses portes pour les enfants de 2 mois à 4 ans: Babigou Breizh. Lundi soir, une convention de mise à disposition d'une place a été signée: cela représente 55 heures par semaine, mises à disposition de parents avéens dès le mois de septembre. Plusieurs familles peuvent en bénéficier.

Une grande ouverture d'esprit pour les petits

«Cela apporte aux petits une ouverture d'esprit et la pratique d'une autre langue», souligne Fabienne Couëpel, directrice de la structure. «Les charges de fonctionnement seront assurées par la collectivité, nous sommes satisfaits de pouvoir proposer ce nouveau service aux familles de la commune», assure Hervé Pellois, le député-maire. Les enfants sont accueillis dans un espace coloré et chaleureux en rez-de-chaussée, avec un petit jardin, par une éducatrice jeunes enfants, un auxiliaire de puériculture, deux personnes titulaires du CAP petite enfance et un agent d'entretien. Le personnel est formé par l'Office de la langue bretonne.

Pratique Babigou Breizh: 125, avenue du Maréchal-Juin, à Vannes. Renseignements: Anne Mahé, directrice du multi-accueil de Saint-Avé, tél. 02.97.60.85.45, anne.mahé@saint-ave.fr



Abonnements et services



S'abonner au Télégramme

Activer mon accès abonné

Télécharger le journal

S'inscrire à la newsletter

Breizh / Bretagne

Bloaz kentañ magouri Babigou Breizh

D'an 13 ha d'ar 14 a viz Here e oa dalc'het ar saloñs evit ar yaouankiz, Générations 2012, e Gwened. Evitarwech kentañ e oa en em gavet asambles Dihun, Div Yezh, Diwan ha Babigou Breizh e "korn ar brezhoneg" hag abadennoù zo bet a-hed an dibenn-sizhun.

Un digarez a oa bet evit ar gevredigezh Babigou Breizh da lidañ bloavezh kentañ he magouri vrezhonek. Corinne Peron, a zo e karg deus an diorren evit ar gevredigezh, he deus kontet dimp penaos emañ kont.

Brav e oa "korn ar brezhoneg" er saloñs. Petra oa bet kinniget d'an dud ? Eflamm ar strobineleur, ar gevredigezh Hipolenn, ar gompagnunezh ARTEM hag animatourez hor magouri a oa daet da zeverrat ar vugale. Filmoù berr a oa bet diskouezet hag ar stal Le Floch en deus kenniget katev evit merenn-enderv.

Penaos e kerzh an traoù en ho magouri 'ta ?

Mat eo an traoù. Bremañ e tegemeromp krouadurioù a Wened, Pleskop ha Sant-Teve. Kontant omp kar donet a ra bugale a familhoù brezhonek ha divrezhonek. Meur a familh a oa em gavet er vagouri dre zegouezh ha bremañ emañ graet o soñj get lod kas o c'hrouadurioù d'ar skolioù divyezhek. Unan ag hor palioù e oa ha daet omp a-benn dezhañ dija !

Petra zo war ar stern gant ar Babigou Breizh ?

Tud nevez zo e burev ar gevredigezh hag emañ bet divizet komañs get ur galv d'an donezonoù evit sikour genomp digoriñ hon eilvet magouri e Gwened.

E pelec'h e vefe digoret ?

Gouzout a reomp dija emen e vo, e kornôg kêr-Wened. Choazet eo bet al lojeiz dija hag un dek krouadur bennak a c'hallehemp degemer eno ivez. Embregerezhioù ha tier-

kêr a glaskomp c'hoazh evit kemer perzh en digoradur ivez.

Resev a rit arc'hant a-berzh meur a aozadur publik. Perak e c'houlennit profoù digant an dud ivez ?

Él bep tro ha pa vez difraostet un dachenn nevez, n'a ket reizh an traoù doc'htu. Ur

bochad labour a zo evit digoriñ ur vagouri, ha muioc'h c'hoazh evit unan e brezhoneg.

A-gaoz d'an dra-sen e kredomp goulenñ sikour get ar Vretoned evit delc'hen get hor lañs ha digoriñ ur vagouri arall a-raok pell. Pa ne vehe ket un toullad Bretoned é roñ argant evit sikour Diwan, ne zalc'hehe ket da vont ar-

raok. Genomp emañ hañval, ur seurt. Get sikour a-berzh pep unan e c'hallimp em lañsiñ da vat ha sikour digoriñ magourioù arall e pep lec'h, diwezhatoc'h. Afer raziñ ar Vretoned eo ! Ni 'faot deomp dedenniñ familhoù nevez ha krouiñ labour e brezhoneg.

Morvan Béchard

